



## Kefridi mamm-gozh

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### Evit piv ?

Adalek ar cp en ur sal glas pe get

### Talvoudegezh ar c'hoari

mestroniañ ar c'horf (distagadur, eñvor, kostezerezh)

### Pal ar c'hoari

Eñvoriañ ur frazenn a vo da vezañ adlavaret gant an holl c'hoarierien ha jestr c'hoariet ganto.

### Tro gentañ

C'hoarier kentañ : (alies-tre rener ar c'hoari) « d'ar marc'had eo bet ma mamm-gozh »

Eil c'hoarier : « Aa, ha petra he deus prenet ? »

C'hoarier kentañ : « Prenet he deus ur vilin-gafe »

Memmes diviz etre an eil c'hoarier hag an trede hini ... hag all ...

### Eil tro

Rener ar c'hoari a ouzhpenna un dra hag e jestr c'hoari

- ur fer, ferñ dilhad
- ur sec'herez salad
- ur momeder (un orolaj), brañsigellat
- ur c'hreion, skrivañ
- ur barr-livañ, livañ
- ur binveg-sonerezh, selaou sonerezh
- un akordeoñs, hag all ...

Tu zo d'ober gant danvezioù all bet gwelet en-a-raok, da skouer loened ha marmouzañ pe drouzhañ anezho, anvioù legumaj, frouezh, arrebeuri, dilhad na vint ket da jestr c'hoariñ eveljust.

### Doareoù all da c'hoari

Evit mont buanoc'h hag evit ma ne vefe ket enoeüs ar c'hoari, lakaat pep c'hoarier da zibunañ ha da ouzhpennaat un dra.